



CHANSON

VAR SUJET

AR C'HISIOU NEVE.

Var ton : Cete me éru, va mignon.

BREMA, pa meus eun tam amzer,
Pluen ha liou, eun tam paper,
Me gompozo hirie an de
Var sujet ar C'hiziou neve.

Nep na gompren netra abet
Vo, marteze, eun tam choqet;
Nep n'eus sqient ha talantchou,
O clêvet anê a c'hoarzo.

N'en devo den lec'h da sacha,
Diouzomp oll e cozeàn;
Pepini'n devo e voqet;
Grit attantion, me ho ped.

Ar bed a zo sclêrijennet,
Ar sperejou zo digoret;
En amzer gôs meus remerqet
An dud voa muioc'h guenaouec.

En amzer gôs meus remerget
 Pa vije da vont d'eur banquet,
 Qercoulz ar vam evel an tad,
 A yê d'ar banquet var o zroad.

Ha beza dêze qezeg mad',
 Voa güell gante mont var o zroad,
 Gant aoun na vije lavaret :
 Ar re-mâ zo n'em distinguet.

Red eo beza disqientet,
 Qemer poan vid espern qezeg!
 An dud zo bremâ muioc'h sur',
 A guemer o oll plijadur.

Bremâ, pa vent er marc'hajou,
 E ve gante parapluïou;
 Ze a espern o dillat brao,
 Neus fors peguer bras ve ar glao.

Bremâ c'houi rânco consanti
 Eo presant speret pep-hini :
 Gouechal evel liboudennou
 E voa an dud er marc'hajou.

Bremâ zo eun economi,
 A ra plijadur en peb ty :
 Charabanniou o deveus grêt,
 A espern dê calz ar c'hezeg.

Gant eul loën seul e ve treinet
 D'ar marc'hat an dud hac an hed;
 Deus ar glao e maint en abri,
 O marc'hadourez coulz hac hi.

Amzer zo bet, eur melinaer
 En devoa pemp a guezeg caer;
 Gant unan seul e ra bremàn,
 Dre m'en deveus eur charabàn.

Ze ra deàn economi,
 Ar profit a chom en e dy;
 Arc'hant ha boued a chom gantàn :
 Va bennos gant ar charabàn,

Goechal ar mignon p'errue
 Ebars en ho ty da vale,
 Mac'h erruje en eur c'hoeza,
 En a gavage laz da eva.

Bremâ n'eo get evel goechal
 Grêt e ve dê antren er zal;
 Ar güin côs hac al liqueuriou
 A ve servichet d'an autrou.

Bremâ, gant o habillamant,
 N'em distingont p'o deve c'hoant :
 Ober ze na ellont get ès;
 Bisqa reont rac an dud qès.

Eun domestiq a ve güelet
 Qer brao hac e vestr accoutret :
 Petra zo caus a guementse?
 O govr ve en avanç gante.

Ar merc'het yaouanq a la fin
 A zo bet eun tam maoc'h fin :
 Dre eur c'his ridicul meurbet
 Int a zo en em distinguet.

E guis lapousset int güisqet;
 Diouesqel o deus, me a gred;
 Gigoyou a ve grêd anê;
 Eur vez ê güelet aneze.

Ar zervicherez a gommanç
 Caout ivez eun tam decoranç;
 Eur parapluï a ve ganti,
 Qer fier evel pepini.

Goechal e voa n'eur vouïaden
 Nevfoa peb matez e steuen;
 Ennes a voa e zoaletten,
 Ia en amzer ancien.

Ha bremâ merc'h eur c'hlasqer boed
 A zoug voulous, franch, colinet,
 Eur chal, eur c'hoef dantelezet,
 Ar c'haera ve possub cavet.

Eur plac'h yaouanq, amzer zo bet,
 Ne gasse gourc'hemen abet,
 Güella m'ell' patiante,
 Qen a yê eur potr e bete.

Collet ê privilach an toc;
 Ar plac'h a ya bremâ aroc;
 Cass a ra e gourc'hemennou;
 Pa vel ne deu den var enzro,

Brao e zeo bea potr bremân,
 Rac ua vanq mann ebet deân;
 Ar merc'hed yaouanq a ro dê
 Peadra evit o difrê.

Demeus a guær eur potr yaouanq,
 Mar car bea lur ha prudant,
 A rai eur fortan vad, mar car
 Monet var ar mèz da glasq par.

Bete m'en devo da vale
 Eur montr gantàn eus e goste,
 Cetu-én bremàn eun autrou
 D'ar re a zo bras o guenou.

Goechal e voa ar vèleyen,
 An noblanç, an dud a bluen
 A zougue montr en peb tachen,
 Ia en amzer ancien.

Bremâ, bete gant meveillen,
 Potret-saout ha qemenerrien,
 E veler pe montr, pe chaden.
 Collet eo ar c'hiz ancien.

Ar bla qenta ma temeont
 E ve ret dè goerza o montr
 Évít çaut o necessite :
 Et ar vanite a goste.

Daou pe dri blavez goude ze
 Cetu dè carg a vogale;
 An dillat caer a ve goerzet
 Évít çaut d'o bugale boued.

Bremâ gant eur porpant lien
 En em gav goal faro an den;
 Eur c'hos bragen a ve gantâ,
 Losten e rochet o treina.

Ar vreg yaouanq e deus ive
 Eur gos cotillonnen bemde,
 Hac bi qer lous hac ar pec'het;
 An diaoul en dour e deus güelet.

Amzer zo bet eur plac'h yaouanq
 A chomme pell ha fur ha coant;
 A chomme pell ha fur ha coant,
 Rac n'ave qet a vouin-ardant.

Bremâ n'en deo qet er guis-se :
 Ret e zeo heuill ar c'his nêve;
 E forsiou a ya ganti
 Qer latous evel peb hini.

Ar scoden, pa ve achuet,
 E fenn a ve batorellet,
 Ha pa ya evit mont d'ar guêr,
 E coll betec e davancher.

Eur potr yaouanq a ya ganti
 D'e c'hundui betec e zy,
 Hac bi leun a zour hac a fanc :
 Pebes enor d'ar potr yaouanq!

Goechal an hostaleriou,
 Dreist oll epad an offiçou,
 A vije serret mat an nor :
 Bremâ e maint dre oll digor.

Bremâ, en nôs evel en de,
 C'houi a zo erru mad gante,
 Qen a vo hoc'h arc'hant lippet;
 Goude ermès e viot tolet.

Ar c'his zo brema evelse;
 Caer e zeus prezeg dec'h var ze,
 Ne deufac'h get furroc'h a ze :
 Ret eo dec'h heuill ar c'his neve.

Va speret a zo trubuillet;
 Eun dra am boa c'hoas da laret;
 Fachiri a vo, marteze,
 Goude clêvet ar virione.

Amzer zo bet voa an enor
 Hac ar merit rê an decor;
 Brema na zeller get ouz se :
 Antreit en ty, m'oc'h eus leve.

Brema eo ar binvidiguez
 A ve preferet alies
 D'an honestis ha d'ar furnez,
 Ha mar doc'h paour, chommit ermès.

Brema e zeus eur c'his neve
 Da elevi ar vugale;
 Vit o güelet oc'h ober fall,
 Arabad eo dont d'o zamal.

Pa reont eur mechancete,
 O zud a c'hoarz o velet se;
 Ar buguel a guemer e gre,
 Hac a ra falloc'h goude ze.

Ha pa vezo erru en oad
 Da c'honit eun draic benac,
 Mar fell d'e dud blam anean,
 E vo ar rêson vad gantàn.

Mar lar e dud deàn brema
 O zicour eun tam da veva,
 D'e dad, d'e vam vo respontet :
 Ma n'oc'h qet contant, baleet.

Pa vent en eur pardon benac,
 Ma velont o mam pe o zad,
 Mar deont evit comz gante,
 O deus mez o velet anê.

Mar goul unan benac oute :
 Ha c'houi hanavez an dud se?
 E laront d'o c'hompagnunez :
 N'anaveàn qet ar paour qèz.

Cetu aze an disprisañç
 Hac a ra da Zoue offañç,
 Dianzav tadou ha mamou
 Neus bet gante calz a boanniou.

F I N.



E Montroulez, e ty LÉDAN, Impr.-Librer.